

PENNAD STUR

Biskoazh c'hoazh ne oa bet gwelet kement a dud lakaat o anv asambles e SKOL-VEUR BREIZH-UHEL hag ar bloaz-mañ pa zeuas an dud d'en em enskrivañ evit an aotreegezh vrezhonek. Leun-chouk e oa ar sekretourva bras, setu ar gevrenn geltiek aet da gevrenn vrasañ ar SKOL-VEUR.

Nag un trec'h !

Nag a labour war ar sternivez. Stummañ kelennerien barrek war o yezh, digeriñ d'ar brezhoneg an eurvezhoù reizh e pep skol, gounit evit pep skoliad ar gwir da studiñ yezh e vro m'en deus c'hoant... Gounit ar gwir da vezañ BREIZHIZ e BREIZH, kement-mañ ne vo sevenet nemet ma ouzomp ledanaat diazez an Emsav, gounit tachenn, gounit tud d'hor stourm. Un darn vat eus al labour da zivezhekaat ar Vretoned a zo bet boulc'het gant tud a youl DIWAN, deomp-ni da reiñ ar skouer a dud dibleg en o stourmadoù, en o yezh rak e BREIZH eo, e-touesk hor c'henvroiz emañ ar stourm da vezañ gounezet.

Ret e vo bezañ mennet-start da ziframmañ digant ar gouarnamant muioc'h eget bruzunachoù a rannvroeladur hag un adkempennig da stad hor yezh...

AL LANV CPPAP 62602

Kelaouenn diskleriet hervez lezenn
HERE 1981


Moulet e Bretagne Ateliers,
146, Straed An Oriant, Roazhon.

Koumanantoù: 50 lur (boutin)
80 lur (skoazell)

Da: AL LANV, 3, ST. ILE-DE-BATZ,

29000 KEMPER

LESTR-SPLIJ RUSIAN WAR UR ROCH



TAOLENN

IWERZHON	P 3
KEMBRE	P 5
EUSKADI	P 7
DIWAN	P 8
HAG HOR YEZH	P 11
AR FLATRER	P 12
KELEIER AR MENEZ	P 17
LOENED	P 18
SONEREZH	P 19
GERIOU KROAZ	P 23
EVIT AR VUGALE	P 24
PSI KOZH NOE	P 25
GALV	P 26
TUDU	P 27
KARGEDOULL	P 28

9 LUR

IWERZHON

DISOC'H AN HARZ - DEBRIN

D'an 3 a viz Here : abaoe un nebeut devezhoù e vez lavaret ec'h eo tost echu an harz-debrin. Tud ar stourmerien a zo rannet e daou strollad : ar re a zo prest da gas an harz-debrin betek ar fin, zoken ma varvo o mibien hag ar re o deus divizet aotreañ ar vedisined da reiñ louzeier d'o mibien pa gollfent o anaoudegezh.

An noz-mañ, avat, en deus roet kuzul ar stourmerien un destenn d'an holl gazetennoù ha d'ar radio-tele. Ar veleien ha pennoù-bras an iliz katolik eo o deus lakaet fin d'an harz-debrin, en ur lavarout ne dale ket ken ar boan kenderc'hel, hervez an destenn-se. Anaf e oa ne blegfe ket ar gouarnamant saoz, o deus lavaret ar veleien.

Abaoe marv Mickey DEVINE (sellit ouzh Al LANV, Gouere-Eost 1981) o deus galvet familhoù ar stourmerien ar vedisined pa oa erru o mibien tost d'ar marv. Tud Denis FAWL (hag en deus labourret kalz evit gwirioù ar brizonidi, hag embannet meur a levr da ziskouez krizder arme Bro-Saoz) a oa a-du gant ar familhoù-se. Brudet eo bet istor Liam Mc CLOSKEY ha Paddy QUINN. Ouzhpenn-se gouarnamant Dulenn a zo chomet hep lavarout ger 'bet diwar-benn ar brizonidi goude an emvod etre Fitzgerald (ar ministr kentañ) ha familhoù ar stourmerien, e fin miz Eost. E-pad an emvod-se en deus lavaret Fitzgerald e oa bet graet pep tra posupl evit cheñch menoz ar Saozon. Abalamour da se eo chomet an dud e-barzh burev Fitzgerald da vanifestiñ (kaset int bet kuit war-lerc'h gant an archerien).

Setu 'ta roll ar stourmerien a zo marv evit "ur menoz sot" (hervez ar Saozon) da lavarout eo evit diskouez ne cant ket torfedourien digalon hag ez eo o stourm ur stourm politikel.

Bobby SANDS, kannad, marv d'ar 5 'viz MAE
Francis HUGUES " an 12 " MAE
Ray Mac CREESH " an 21 " MAE
Patsy O'HARA " an 21 " MAE

Joe Mc DONNELL marv d'an 8 'viz GOURE
Martin HURSON " " 13 " GOURE
Kevin LYNCH " " 1 " EOST
Kieran DOHERTY (T.D.) " 2 " EOST
Tom Mc ELMEE " 8 " EOST
Mickey DEVINE " 20 " EOST

Ret eo derc'hel soñj deus ar re a zo marv e-barzh ar manifestadegoù a zo bet e-pad an hafv-mañ : bugale ha tud kozh lazhet gant boledoù plastik an arme Saoz (hervez Whitelaw, ministr an urzh e Bro-Saoz, eo re zañjerus ar boledoù-se da vezañ implijet e-pad ar manifestadegoù e Bro-Saoz. Iwerzhoniz n'int ket tud, 'vel just). Ar re inosant-se ne vint ket brudet. Ne oa ket dedennet ar c'hazetennoù ganto.

Abaoe dibenn an harz-debrin en deus lavaret ar ministr James PRION (anvet e plas Humphrey Atkins e penn-kentañ miz Here) e vefe cheñchet traoù' zo e-barzh holl doullou-bac'h hanternoz Bro-Iwerzhon. Dilhad sivil a vo roet d'an holl, ar gwir o do ar brizonidi d'ober skol, h.a.....

N'eus ket pres war ar Saozon, koulskoude, da gas da-benn ar cheñchamantoù-se.

Kazetennoù "izel" poblek Bro-Saoz a hvar ec'h eo bet trec'h an Itron THATCHER met tri goulenñ diwar ar pemp a zo bet anavezet gant ar gouarnamant saoz.

Cheñchet eo bet menozioù ar bobl dre vras e Bro-Iwerzhon. An Unionisted a zo fuloret a-enep ar cheñchamantoù e-barzh an toullou-bac'h. Krediañ gant eo oa bet gounezet ar c'hoari gant ar gouarnamant. Lod anezho a lavare e oa gwelloc'h evit ar Republikaned mervel. Abaoe ur miz eo adkroget tud an U.D.A. da lazhañ "Katoliked".

Al lodenn vrasañ eus ar bobl vroadelour a zo a-du gant stourm ar Republikaned (zoken ar re a oa a-enep dezho a-rack an harz-debrin) evit ar mare da nebeutañ. Evit pezh a sell ouzh an I.R.A... hag-ef e vo klasket adarre kaout kannaded er parlamentoù ? Meur a sli a zo en o-dest. Hag-ef e vefe kreñvoc'h hag efedusoc'h o stourm en ur implijet an nerzh hag ar mouezhadegoù asambles - evel m'en deus


graet PARNELL en naontekvet kantved ha SINN FEIN er bloavezhioù 1919-1921 ? N'eus forzh penaos eo anat ez eus bet divizet stourm war an douar saoz - e Breizh-Veur a-enep an arme saoz. Klasket ez eus bet lazhañ soudarded e CHELSEA (Londrez) d'an 10 a viz Here.

Fitzgerald. N'eo ket seurt traoù a lako anezho da cheñch o menoz, met un disklariadur a-berzh ar Saczon da lavarout e yeont kuit.

Bout a ra hag a lavar en deus c'hoant Fitzgerald lakaat ar bobl da soñjal e-barzh-se kentoc'h evit e-barzh kudennoù ekonomikel ar stad. Nac'het o deus ar sindikajoù kuzuliañ gant ar gouarnamant a-zivout ar goprou. Kreskiñ a ra ar prizioù a-gaoz da bolitik ar c'hengouarnamant + 30 % a-benn fin ar bloaz-mañ, hervez ma lavar an dud barrek war an danvez-se.

Evit echuiñ, ur c'hel mezhus. Laosket en deus gouarnamant Dulenn ar vreudeur Littlejohn da vont da Vro-Saoz. Tapet e oant bet o-daou, oc'h ober atahinerezh 'ba'r c'hreisteiz evit an M 16 (servij kuzh ar gouarnamant saoz). Kenneth LITTLEJOHN en deus skrivet pennadoù o tiskouez penaos o deus graet o labour. Ne oa ket echu amzer toull ar vreudeur Littlejohn, met n'eus forzh penaos, divizet ez eus bet leuskal anezho da vont kuit war an diviz ma ne zeuint ket ken da Vro-Iwerzhon ! "Evit abegoù denelour" ivez. Hag-ef ez eus bet graet ur marc'had kuzh gant gouarnamant Thatcher ? Hag-ef eo kroget amzer ar c'henlabour e gwirionez ?

E. O'CIOSAIN



E-barzh kreisteiz Iwerzhon eo bet lakaet an dud da brederiañ war gudenn an hanternoz. Tu 'zo bremañ da dabutiñ deus ar gudenn-se.

Evit ma ne vefe ket komzet kement-se deus ar Republikaned emañ ar ministr kentañ Fitzgerald o stourm evit tennañ traoù 'zo diouzh mammelezenn ar c'hreisteiz Da lavarout eo, an artikloù a lavar ec'h eo 32 gontelezh Bro-Iwerzhon tiz broadel. Soñjal a ra ar ministr kentañ tennañ an artikloù-se evit nompas feukañ an Union-isted. Ar re-mañ avat a ra goap deus



- Tudu -

KEMBRE

AN EISTEDDFOD VROADEL

Lavaret ez eus bet ur wech gant ur c'hwil bennak eus ar vro e oa an EISTEDDFOD VROADEL kêrbenn Kembre. Ur seurt gouel poblek eo an EISTEDDFOD ma tered dezhañ a bep korn eus Kembre d'en em vodañ e-pad ur sizhun e derou miz Eost. Dont a reont da gemer perzh e oberiantizoù unyezhek e kembraeg, kenstrivadegoù kontañ, kanañ, koroll. Dont a ra tud ivez da welout pezhioù-c'hoari, da selaoù abadennoù sonerezh pe da vont da "novezhioù laouen" pe da zañsoù diouzh an noz. Ul lec'h darempredif brudet eo evit ar vignoned a-gozh n'en em welont ket mod-all eus an eil penn d'ar bloaz d'egile. Hevlene ez eus tramenet war-dro 150.000 a dud en EISTEDDFOD e MALDWIN e-pad sizhunvezh an Eisteddfod. Un Eisteddfod vat eo bet hervez paotred ar c'hazetennoù. Unan eus an abegoù, sur-awalc'h, eo edo telenn SAC war an dachenn. Kement-mañ en deus roet, sur-tre, feiz da galz a Gembreiz e-keñver an dazont.

War-dro 680.000 lur saoz he deus koustet an Eisteddfod-mañ, darn o tont eus sikourioù a-berzh ar c'henvarc'had, darn all eus ar c'huzulioù-kontelezh e Kembre met kalz ivez eus chakodoù an dud a zo o chom e korn-dro an Eisteddfod. Ar bloaz a zeu e vo dalc'het an EISTEDDFOD VROADEL en ABERTWE war dachenn ar skol-veur e-pad sizhun gentañ miz Eost.

GORSEZ AN EISTEDDFOD KURUNENNADUR AR BARZH

Ul lodenn ispisial eus an EISTEDDFOD VROADEL eo gorsez ar varzhed. Un doare da enorif an dud wellañ e buhez Kembre eo ar gorsez. E izili a zo bet degemeret da arnodennoù ispisial e sonerezh pe lennegezh kembraek pe c'hoazh o deus rentet ur servij a-bouez da vuhez ha sevenadur Kembre.

Al lidoù pouezusañ en Eisteddfod eo hini ar c'hurunennañ d'ar Meurzh hag hini ar c'hadoriañ d'ar Yaou. Reif a reer ar gurunenn hag ar gador d'ar re o deus skrivet ar varzhoniezh wellañ

war destennoù kinniget ar bloaz a-raok.

Ar bloaz-mañ e MALDWIN eo aet ar gurunenn gant Sion ALED. 24 bloaz eo hag e-touesk ar re yaouankañ da vezañ gounezet ar gurunenn. Brudet-tre eo bet e stourmadoù Cymdeithas Yr Iaith Gymraeg. Kaset eo bet d'an toull-bac'h peder gwec'h da vezañ kemeret perzh er stourm da gaout ur chadenn kembraek hag er stourm a-enep an tiez-hañ e Kembre. Lavaret en deus eo en toull-bac'h m'eo deut dezhañ kalz eus an trivlidoù dispaket en tamm arz a dalvezas dezhañ an trec'h en Eisteddfod.

Boas eo gounezet ar gurunenn da emezelañ e gorsez ar varzhed. Ne oa ket Sion ALED avat evit heuliañ ar boaz-se. Re a bilpouzerzh a zo gant lod eus e izili, emezañ. Lod eus e izili memes ne gomzont ket kembraeg ouzh o bujale hag int izili eus un aozadur a ra gant ar c'hembraeg evel yezh ofisiel !

TIEZ-HANV HARLECH

An embregerezh sevel-tiez H.D.C., ez eo Dennis THATCHER (gwaz ar c'hentañ Ministr Margaret THATCHER), rener anezhañ, en deus c'hoant sevel 63 ti e HARLECH, e kontelezh Gwynedd. Hervez un enklask graet daou vloaz 'zo, 27 dre gant eus tiez ar vro-se a zo tiez-hañv. Dre ma'z eus ouzhpenn trawalc'h a diez er vro dija da dalañ ouzh ezhommoù tud ar vro ne rafe sevel tiez ouzhpenn nemet gwashaat stad an traoù. Savet e oa kuzul kontelezh Gwynedd a-enep ar raktresoù ; tud ar vro ivez a oa a-enep ma vefe savet an tiez. N'eus forzh penaos e troas an embregerezh H.D.C. ouzh ar sekretourva kembraek da c'houlenn an aotre da gendec'hel gant ar raktresoù. Netra ne voe graet ken ne skrivas Dennis THATCHER ul lizher personel da Nicholas EDWARDS (Sekretour ar vro er sekretourva kembraek, unan eus izili vrudetañ strollad an Doried hag ezel eus gouarnamant Margaret THATCHER) da c'houlenn digantañ abeg an dale da reif asant d'ar raktresoù. Da heul kement-se e laoskas Edwards al labourioù da vont war-rack. War veno an dud voutin e Kembre ez eo re duet Edwards da zougen dorn da embregerezh Thatcher.

Ar pezh en deus dedennet evezh ar c'hazetennoù eo un eilskeudenn bet tennet eus al lizher skrivet gant Dennis THATCHER da EDWARDS hag a grog gant gerioù nigon-

lezh "Dear Nick" hag a echu gant ur c'hennenn lakaet gant Edwards da unan eus kargidi ar sekretourva kembraek "There had better be a good reason for this delay" (Spi an eus ez eus un abeg a-zoare d'an dale-mañ). Pelloc'h emañ kuzul kontelezh Gwynedd e soñj kas an afer dirak an "Ombudsman" (Ef eo an hini a varn stalioù ma c'hoarvez enno un diemglev etre hiniennoù, kontelezhioù hag ar gouarnamant).

CYMRITHAS YR IAITH CYMRAEG
(Kevredigezh ar Yezh Kembraek)

Bet he deus, e-giz m'hon eus lavaret, Kevredigezh ar yezh ur roll a-bouez bras er stourm da c'hounit ur chadenn tele e kembraek. Daoust da savidigezh S4 C (Sianel Pedwar Cymru - Chadenn Pevar Kembre) e talc'h lod eus hec'h izili da vezañ kastizet da vezañ kemeret perzh er stourm. Wayne WILLIAMS, kadoriad ar gevredigezh, a oa bet toullbac'het e-pad nav miz gant Lez ar Gurunenn Bryste (Bristol) da vezañ iriennet da ober distrujoù er c'hreizennoù skignañ. Kelenn-er war ar c'hembraeg eo e skol anterin LLANIDLOES e kreiz Kembre, Abalamour d'e berzh e stourm ar pevare chadenn o deus divizet renerien ar skol e zifredañ peogwir e krede dezho e oa kontrol e c'hererezh politikel d'e roll a gelenner. Hogen ne oa tra ebet evit diskouez en dije Wayne WILLIAMS graet e vad diouzh e vicher da levezoniñ ez politikel ar skolidi. War menno e gengelennerien ez eo WILLIAMS ur c'helenner dreist. Sur-awalc'h eo rakvarn politikel a-enep kembraek ar guzulierien a zo pennabeg an diviz.

Ur stourm all emañ ar gevredigezh o kas war-raok, hini kembraek skol-veur Kembre.

7 skolaj he deus skol-veur Kembre. Pep a hini e Bangor, Aberystwyth, Llanbedr hag Abertawe ha tri e Kêrdiz (Caerdydd). An darn vrasañ hag a-bell eus ar studierien a zeu eus diavaez Kembre. Dedennet o deus ar skolajoù-se kalz a ssozon er c'hornioù-bro kembraekañ e kornog Kembre, tro-dro da Vangor, da Aberystwyth ha da Llanbedr. Daoust m'eo prest-awalc'h lod eus an dud nevez embroet da zeskif kembraeg ez eus lod all n'int ket prest d'ober ar strivadenn.

Daoust ma'z int skolajoù eus skol-veur Kembre ne roer enno nemet nebeut-tre a bouez d'ar c'hembraeg en oberezhioù ofisiel. Dija e stourm a-vremañ ar gevredigezh da gembraekaat skolaj Aberystwyth ez eus bet kaset daou ezel ugent vloaz d'an toull-bac'h. Hervez Ffired FFRANSIS, ezel eus kuzul ren Kevredigezh Ar Yezh, eo sur an divizoù-se da vroudañ tud all da zont d'ar stourm da gembraekaat ar skol-veur.

John IDRIS

BREMAN - 8, straed Hoche - ROAZHON

Bep 2 viz e teu ingal "BREMAN" er maez. Bep 2 viz e vez kavet 'barzh keleier e brezhoneg aes ha bev diwar-benn buhez ha stourmoù Fobl Vreizh.

CASTENN ER STOURMOU E BREIZH

bremañ

NIV. 6.0 eost-gwengolo 1981 51ur

ad tu kleiz
bet 'barzh
poent sachañ,
tudon!



NIVERENN DOUBL

Bep 2 viz... n'eo ket trawalc'h. Ur wir gazetenn a rankomp kaout bep miz, bep 15tez, bemdez...
Met evit-se eo ret kaout muioc'h a voneiz bihan o tont ingal : KOUMANANTOU, setu 'pezh zo dav kaout. (30 lur pe 50 L.skoazell)

EUSKADI

STOURM A-ENEP NUKLEEL

Kenderc'hel a ra ar stourm a-enep kreizenn LEMONIZ. Dibunadegoù bras e kreisteiz EUSKADI a zo bet klasket mogañ evel boaz. D'an 30 a viz Eost ez eus bet tennet war an dud gant boledoù plastik, tud gloazet zo bet.

Rannet eo emsav broadelour EUSKADI war gudem an energiezh nukleel. Kenderc'hel a ra E.T.A. gant he gwalldaolioù a-enep IBERDUERO. 66 gwalldaol o deus graet e-pad 6 miz kentañ ar bloaz, lazhet o deus ivez ar pennijinour RYAN. An niverenn eus kelaouenn E.T.A. "Zuzen" a zo gouestlet d'ar stourm a-enep nukleel.

Er P.N.V. ez eus bet kinniget daou deuliad kontrol evit pezh a sell ouzh LEMONIZ. Unan a sav a-du gant ar greizenn dindan divizoù 'zo, un eil a c'houlenn ur referendom en teir froviñs hag un dale divizout a zek vloaz. Kinniget e vo an daou vennad-mañ e bodadeg disreol ar strollad.

DEPARTAMANT EUSKAREK

Jean-Pierre DESTRADE, kannad sokialour eus EUSKADI, a zo unan eus difennourien krouidigezh un departamant euskarek. Lavarout a ra memestra : "Ne fell ket deomp reiñ an dorn da adunanifiñ ar seizh proviñs euskarek. Ne oa ket posupl ober eus ar vro euskarek ur rannvro ; re vihan eo ar vro he nebeut a dud enni. Mennet omp koulskoude da grouiñ un departamant nevez". Enebourien zo d'ar raktres-mañ ha n'eus forzh penaos e vo daleet er pleustr. Ne vo kinniget ar raktres er parlamant nemet e penn diwezhañ 1982 pe e penn-kentañ 1983 evit ma teuo da vev an departamant goude ar votadegoù kuzulioù-kêr ha rannvroioù e 1983.

HARLUIDI

Ma seblant termal ar gouarnamant gall da bourchas d'ar bolis spagnol repuidi ereet ha tout, ne chom ket da dermal pa'z

eus kaoz eus frankiz an harluidi war an dachenn c'hall. Betek hen e oant kaset da enez Yeu e-lec'h ma'z eus bremañ 37 tokarn, 17 enseller R.G. hag ul lestr eus ar morlu da zivall 5 Euskarad. Savet 'zo c'hoant da DEFERRE avat kas ar repuidi pelloc'h, betek inizi gouez ar c'hornog, betek enez EUSA.

D'an 21 a viz Here e voe kaset kelod da guzul-kêr EUSA. Kerkeret en em save ar c'huzul-kêr hag ar bolis da heul a-enep seurt diviz. Berzet e voe ar porzh hag an aerborzh d'an archerien ha d'an Euskariz kaset ganto. Abegou liesseurt a oa d'an nac'hadeg "noazañ a rafe ouzh an douristelezh hag ouzh sioulded an enez" setu an arguzenn bouezusañ. Setu pezh a lavare an Aotrou Maer : "N'on ket tuet a-enep an harluidi bolitikel nag a-enep Euskariz, o bro a anavezant mat, mont a ran di war ma ehanou a-wechoù. Met re eo kompren hon eus ni, Bretoned, evel Euskariz, ur bersonelezh da virout ha ne vefe ket aes gant kemend-all a archerien war hon enez".

A-benn ar fin, d'al Lun 2 a viz Du e plegas Gaston DEFERRE en ur c'hoarzhin "glas" diwar-goust tud EUSA "Kement ha kement a rannvroioù hag a c'hêrioù a c'houlenn muioc'h a archerien d'o diwall. Gwazh a se d'ar Vretoned-se ha gwazh a se d'ar gemerzhourien o dije gelllet tennañ gounid diwar an dud kaset d'an enez".

Un dra vat, sur-tre, eo bet nac'hañ degemer ar bolised hag an Euskariz di-wallet ganto. Gwelloc'h, e-dra-sur, e vije bet hen ober dre abegou a gendrediezh gant stourm Euskariz.

P. AN HABASK

SKRID

DANEVELLOU-BARZHONEGOU
TROIDIGEZHIOU

RENER : GW. DENEZ

KOUMANANT EVIT 4 NIV.
40 LUR DA BER DENEZ
RI-PLOARE - 29100
DOUARNENEZ

DIWAN

AN DISTRO - SKOL E DIWAN

- 15 a viz Gwengolo. Holl veginoded Breizh a zo pare da stagañ ganti evit o c'hentañ blizenn-skol. Fier, droch, ruz gant o boestad kreionoù liv nevez, o sac'h-skol war e gentañ lamm, e skoont balc'h ha seder tramek charbarle ar skol, kuit a ziegl. A-gentizh ma tenesaont d'an nor avat, e teu kemm war zoaeroù lod anezho, e veuneka o zresoù s'ichant betek-hen ; setu lipet kuit skoultrenn hor boulomigoù, stonkañ 'ra o gourlañchenn en em c'houlenn war be billig e vint fritet, stardañ dorn mammig, klask straññ, ruzañ, c'hoari an dro, ha, daoust da weñc'hoarzh degemerus ar vestrez-skol e chomont paerek ha peuliet dirazi, dennet o holl evezh war vejoù o botoù, dibuk-groñs, hag ec'h anata an daeroù...



- Setu an daolenn a liver deomp bep bloaz da vare an distro-skol, koulz war ar skinwel ha war ar skingomz pe er c'helaouennoù. Hag evel-reizh, mouezh teneraet ar c'homzer o tezevellañ deomp

an enkrezioù a wash hag a c'harvask egin ar remziadoù da zont. Moarvat n'o deus morse taolet troad ebet en ur skol DIWAN ... Gwir ivez ez eo yaouank c'hoazh hol luskad

- Ha neuze, bugale DIWAN ? Penaos emañ kont gant o c'halite ? Na dit ket da vasañ chalament ganto ! Dichal-kaer ez int ouzh arc'hoazh. Skiltr e tregren o c'hoarzhadennoù e bueson rip diskar ar bloaz war ar porzhioù-skol. Ha gant DIWAN hec'h-unan ? Heñvel emañ kont ? N'eo ket tre. Abegoù a zo da laouenaat eveljust, met bez ez eus da chalañ ivez.

- Tamm-ha-tamm ez a niver ar skolioù war-gresk, hag a-feur e kresk ivez niver ar vugale o darempred, eleze, niver an dud a gred kas o bugale dezho. Bez e kresk ivez, anat deoc'h, ar c'hudennoù arc'hant. Setu da heul un toullad sifroù, kement ha reif da c'houzout deoc'h stad an traoù war zerou ar bloavezh-skol 1981 1982.

Skolioù bihan :

- 16 a zo anezho, e KLEDER, BREST AR RELEG, TREGLOU, PORSAL, LESNEVEN, GWENGAMP, AN HUELGOAD, LANUON, ST.BRIEG PONT-'N-ABAD, PLEUVEILH, IRVILHAG, AN

ORIENT, NAONED ha ROAZHON. Bez ez eus dre vras un dek bugel bennak e pep skol, e lod n'eus nemet c'hwec'h, met er c'halz muiañ anezho en em gaver gant trizek pe bemek a vugale.

Skolioù kentañ-derez :

Daou vloaz 'zo e krogas DIWAN da zigeriñ klasoù kentañ derez, n'eus ket bernioù anezho evit c'hoazh, hogen boulc'het-kaer eo an erv ha buan e vrasay an niver anezho.

E TREGLOU e tigoras an hini kentañ gant tri bugel hag a grogas a-zevri da zeskiñ lenn, skrivañ ha kontañ. E brezhoneg evel-just. Bez emaint bremañ en o eil bloavezh, eleze en 10vet klas (C.E. 1) ha re all o deus tapet o lec'h en 11vet (C.P.).

E penn kentañ ar blizenn-skol-mañ, e voe digoret un eil skol kentañ derez e PONT-'N-ABAD, gant tri bugel ivez. Sed ez eus div skol kentañ derez, tri c'hlas enno, o kenderc'hel labour ar skol-vihan hag o vont war-zu an eil derez, a-benn pevar bloaz.

- Da sikour an holl skolioù-se, ez eus poellgorioù-skoazellañ e pep lec'h ma'z eus ur skol. Pal ar re-se eo brudañ menzioù DIWAN, kelac'uf an dud, klask tud a vefe a-du da gas o bugale, met ivez ha dreist-holl dastum an arc'hant ret d'ar skol da vont en-dro ha gant al labour-se eo ez a ar pep brasañ eus o amzer. Poellgorioù-skoazellañ all a zo strewet dre ar vro : en ALRE, GWENED, KASTELLIN, KARAEZ, TREGON, KEMPERLE, ST. NAZER, FOUESNANT hag ivez e PARIS. Pal ar re-se eo klask digor ur skol nevez. A-barzh ma aotrefe DIWAN kreiz e vefe savet ur skol ez eo ret d'ar poellgor bezañ dastumet 3 milion kozh, bezañ kavet da vihanañ pemp bugel a zarempredfe ar skol ha bezañ kavet a-walc'h a dud a rofe arc'hant ingal dre skodennoù miziek, d'ar skol da vezañ emren e-keñver arc'hant.

- Aes eo kompren ez eo gant kudenn an arc'hant eo ar muiañ daoubennet tud DIWAN. Diaes bras eo zoken da skolioù 'zo skoulmañ ganti. Ezhommoù arc'hant

DIWAN a savo betek 200.000.000 kozh evit ar bloaz 1981. Ur gudenn diaes he dirouetlañ eo kavout hevelep sammad. Evit bremañ e teu deomp evel-mañ :

- 30 % dre skodennoù miziek a vank-da-vank
- 10 % dre yalc'hadoù roet gant an aozadurioù lec'h
- 20 % dre brofoù diseurt
- 40 % dre ar gouelioù, ar festoù-noz, ar standoù,.....

Daou vloaz 'zo ne zeue nemet 12 % gant ar skodennoù miziek, anat 'oa deomp n'edomp evit talañ outi pelloc'h evel-se Divizet e voe ren ur stourmad war an dachenn-se a voe anvet "AN TAOL 2.000" dre ma felle deomp tizhout daou vil den a gasfe deomp arc'hant en doare-se. Berzh a reas ha 30 % a zeu deomp bremañ. N'eo ket c'hoazh a-walc'h evit bezañ dienkrez. Adkregiñ a reomp ar bloaz-mañ, lakaet da bal ganeomp tizhout daougementiñ ar sifrese. Ra vo klevet hor galv !

- Ar c'hemm politikel deut e-kerz ar miz Mae diwezhañ en deus lakaet goanag da ziwanañ e-touez an holl re a stourm evit dazont ar brezhoneg. Evit tud DIWAN e oa c'hoazh brasoc'h ar spi. Abaoe he c'hrouidigezh e c'houlenn DIWAN bezañ kenstaget ouzh ur servij poblek a zeskadurezh renevezet. Hogen, kement goullenn savet ouzh ar gouarnamant kozh a voe diarbennet ha nac'het groñs. Bremañ, goude bezañ skrivet lizhiri d'an Aotrounien Mitterand, Mauroy, Savary ha da zillennidi P.S. Breizh, ez eo bet degemeret tud DIWAN gant rektor akademiezh Roazhon, d'ar 16 a viz Here. Tro ar c'hudennoù a zo bet graet ha laouen e voe DIWAN eus an emgav-se. Da heul ar c'hendiviz, e c'houlennas ar rektorezh ouzh DIWAN sevel un teuliad gant kinnigoù resis a dalvezfe da zavez gant dalañ a-zivout ar c'henstagadur.

En he zeuliad e c'houlenn DIWAN kement-mañ :


- E vefe digoret ur c'hlas a vez kelennet ennañ e brezhoneg adal ma vo pemp bugel enskrivet.

- Ne vefe ket en tu all da bemzek bugel en ur c'hilas, en askont da gudennou kelennadurezh a sell ouzh stad ar brezhoneg,
- E vefe krouet ur skour e-barzh ar Skol-Normal da stummañ kelenn e brezhoneg,
- E vefe enfredet holl skolaerien DIWAN a-vremañ e-barzh an deskadurezh-stad
- E vefe kelaouet-mat tud ar vugale er skolioù, dezho da c'houzout ez eus tu evit o bugale da gaout un deskadurezh e brezhoneg,
- E vefe ar brezhoneg yezh nemeti an deskadurezh er-maez eus ar c'hentelioù galleg.

- Enebourien a vo kavet koulz e Breizh hag e Bro-C'hall, met an hent nemetañ eo a zo da heuliañ mar fell deomp tizhout da vat an dud, mar fell deomp e kasfe an dud o bugale d'ar skol vrezhoneg. Rak da-neuze e vo torret pep disfiz ha ne vo mui sellet ouzhomp tamm-pe-damm evel ur skol arlezek.

Martial MENARD

LESTR - SPLUJ RUSIAN EN UR GIBELL



LEVRIOU - PLADENNOU - ARZ KELTIEK

RENER : GWELTAZ AR FUR
2, straed ar ROUE GRADLON

kemper
pgz : 95.42.82

SEIZH AVEL



Bier
Beilhadegou

KANERIEN
SONERIEN
KONTERIEN

SIKOURIT AL LANV

CHOMLEC'H NEVEZ AL LANV
ABAQE MIZ GWENGOLO A ZO
8 STRAED ENEZ VAZ
AR BRADENN
29000 KEMPER

HAG HOR YEZH ?

D'ar Sadorn 17 a viz Gouel-Mikel oamp aet da ganal d'ur fest-noz savet get kreizenn C.F.D.T. Gwened.

Hor strollad ni 'zo 6 den abarzh (5 paotr hag ur plac'h) brezhonegourion anehe rac'h, lod e labourat evit DIWAN, lod evit DASTUM, tud a zalc'h d'o yezh atav.

Get unan ac'hanomp e ta berpet stal DIWAN. Stummet eo get ar vicher a varc'hadour. Gras d'ar blankigoù serret dehoñ e ya plaen skolioù Bro-Wened get o hent.

D'ar Sadorniezh-se n'eus bet gounid ebet : rahuizet eo bet deomp ar gwir da zispleg ar stalig e diabarzh sal vras ar fest-noz.

Souezhet bras ha gwall-gounnaret oamp, aes gouiet ! Komzoù trenk a-walc'h 'zo bet get tud ar greizenn-se. Divizet oa bet e pad un dolpadenn-vurev, setu ne oa ket tu da vont a-enev : demokratel eo kement-se pe n'eo ket ? Ali oa an holl pe 'gozig.

Met piv 'ta en doa votet an dra-se pa ne oa diragzomp nemet tud a-du genomp ; lakomp a ziskoueze bout atav.

Piv oa ar c'hwil 'oa daet dehoñ soñjoù treuz ken divalav en e benn ? Kerzhit da ouiet, atav ne seblante ket bout daet d'ar fest-noz, pezh a oa vil dehoñ rak pa vez ar gamaraded ec'h labourat 'vez propoc'h dont da sikour gete.

Tost oamp bet da chom hep kanal, graet hon eus ur sort, dre ma ne oa ket bet diferet en a-raok spis ha splann, e faote deomp lakaat ar stalig, anat oa deomp ha ne welan ket perak e vehe daet deomp ur soñj ken truhezek sort-se diarbenn ar C.F.D.T. Sot awalc'h omp bet marse.

Fiañs m'eus memestra ne vez ket graet kement 'rall get kreizennou arall C.F.D.T Breizh. Kredapl bras emañ fariet izili kreizenn Wened. N'eus ket par da farioù sort-se evit kempenn ur yenaat a-feson

da soñjoù an den. Skornet awalc'h eo ma re. Laket o deus un deiz evit diviz a gement-se. Dav vo sklaeraat an traoù ha doc'h ar reskont e tay marse an diskorn.

Labour a zo c'hoazh d'ober e diabarzh ar C.F.D.T. (emañ ar S.G.E.N. en Talbenn Sevenadurel, nag ar re 'rall ?) N'eo ket ar C.F.D.T. a glaskan tagiñ amañ nemet tud Wened o deus diskouezet e'it ur wezh e tigoront frankoc'h o beg evit dorioù o festoù-noz.

Daniel an Doujet
"Dastumerion ar C'hreisteiz"

Ha sellet o deus doc'h an tele, d'ar Merc'her 28 ha d'ar Yaou 29 a viz Gouel-Mikel, ar re a vez dalbec'h e tamall d'ar Vretoned ha d'ar vrezhonegerion bout bet kenlabourizion epad ar brezel diwezhañ ?

"Le chagrin et la pitié" ur film a zo bet difennet en tele 12 vle pad get gouarnamantoù an tu dehou, a gas soñj a emzalc'h ar pennoù bras er prantad-se. Pennoù bras ha bourc'hizion reor ha roched get an alouberion. Ne dalv ket komz hiroc'h a gement-se met el ma vez laret "Tud zo a wel ur blouenn ha fri ar re 'rall he ne welont ket an treust a zo ar o hini". Ar re a vez berpet e klask diskar ar skritur unvan ar zigarez m'emañ bet "savet pad ar brezel" evit brudiñ o hini "amproueet" get gouarnamant Bro-C'hall a rekehe deskiñ istor kuzh bro o c'halon.

HOR YEZH

EMBANNADURIOU HOR YEZH

GERIADUR YEZH DOUARNENEZ

1. AR PESKED HAG AL LABOUSED
40 lur

HIROC'H EO AN AMZER EGET

AR VUHEZ Danevelloù
gant PER DENZ

36 lur

PETRA 'NA AR FLATRER ?

"PARLER QUE FAIT L'ANE" (KENTEL 7 in OUEST FRANCE)

An dud set war o leve a gav, dre vras, traoù dedennus da ober. Lod a skriv barzhonegoù, lod all a ra war-dro un tammig liorz h pe c'hoazh a chom da c'hoari lallig gant ar vignoned. Pep hini a gav, hervez e blijadur, un dra bennak da ober. Petra en deus kavet A. Le Mercier a soñj deoc'h ? Skrivañ lizhiri. Ya, emañ A. Le Mercier o paouez skrivañ daou lizher : unan da Rektor akademiezh Roazhon (10.10.81) hag an hini all da brezidant an "Association des parents d'élèves pour l'enseignement du breton" (23.10.81). Servijoù kuzh AL LANV, krouet nevez amzer 'zo, o deus kavet an daou lizher-se. Kinnig a reomp d'hol lennerien un tafva anezho.

FREDERIADENNOU UN DIKONER

Gant kentelioù Ouest-France e soñje deomp en doa A. Le Mercier tizhet live zero ar yezhoniezh. Penaos kavout un dra bennak par da : "Le verbe savoir au présent est pratiquement le seul verbe irrégulier en breton. En fait il se conjugue régulièrement sur divers thèmes..." (kentel 7). Neuze reizh, direizh, piv oar ? Hag ivez : "La majorité des habitants de la Basse-Bretagne disent en français le contraire de ce qu'ils veulent dire lorsqu'ils emploient l'expression "faire attention de" (kentel 9). Petra 'lavar an dud-se a-benn ar fin ? Kontrol ar c'hontrol pe ar c'hontrol ? Ha Le Mercier, en niver-bras pe en niver-bihan emañ ? "Mais quoi que ferait avec un âne vieux moisi ?" (kentel 4). Setu e soñje deomp en doa an dikoner tizhet al live zero. Ur mell fazi e oa ! Lennit 'ta ar pezh a zeu da heul...

Parler un "parler local", ou tout simplement le comprendre, est loin d'être suffisant pour pouvoir l'enseigner. C'est un peu comme si, toutes proportions gardées, on demandait à quelqu'un parlant ou comprenant le "patois" gallo, et ayant reçu toute son instruction en anglais jusqu'au niveau du baccalauréat, d'enseigner le français écrit. Certes, le breton écrit est beaucoup plus proche du breton parlé que le français écrit ne l'est du gallo, mais ces locuteurs naturels ne savent pas analyser leur langue, conjuguer un verbe...

Or le breton est une langue très simple - sa conjugaison par exemple n'a que peu de terminaisons, comparées à celles innombrables du français. Un mois de travail intensif est suffisant pour qu'un locuteur natif l'ait écrit.

Ar mestr-skol nemetañ barrek da skrivañ seurt diotachoù : A. Le Mercier. Perak en deus gortozet keid-all arack kas prederiadennoù ken don ha ken talvoudus d'ar Rektor ? Perak ne skriv ket ul levri ? Un dispac'h yezhoniezhel e vefe ! Erfin, gouzout a ra bremañ ar Rektor ez eo displegadur ar verb aesoc'h e brezhoneg eget e galleg... (ar pezh a ziskouez ne oar ket A. Le Mercier ober an diforc'h etre ar skrid hag ar gomz - d'e oad ! - met ne vern. Ur c'helenner dispar eo ha kuzelioù a gas da brezidant an APEEB. Lennit 'ta ar pezh a zeu da heul.

Mais une pédagogie soignée exige un enseignement direct, sans recours à l'autre langue (les maîtres qui font traduire en français le breton qu'ils viennent d'apprendre à leurs

HOUSKET ? ... LONKAN ? ...

élèves détruisent leur propre travail. Si l'immense majorité des petits Français qui ont appris l'anglais à l'école ne le parlent pas, c'est parce qu'ils ont traduit en français.)

Setu ar pezh a skriv Le Mercier. Digredus... Kemeromp ur skouer : "Eh bien, petit gars, dit que serait est Petitboiteux vieux un âne jeune extrêmement" (kentel 7). Setu aze kelennadurezh yac'h. "De-fois j'ai envie prendre la hache à tuer de lui sur l'aire pour avoir sa peau" (kentel 9).

"... si on ne considère pas l'enseignement du breton comme un gadget. "N'est pas à fier à lui deux sou percé" (kentel 9). Gadget ? "Fais attention à attraper un coup patte, père" (kentel 9). Ken barrek eo A. Le Mercier ken e varn ar re all, ha Per Denez da gentañ eveljust...

Par contre, j'ai de très grands doutes sur la compétence de PER DENEZ, professeur à Rennes. Pour s'en convaincre, il suffit d'écouter l'émission NOZ VAD qui a été consacrée aux licences d'anglo-celtique de Brest et de breton de Rennes.

Fa soñjer piv ! "Gouzout a rit ar brezhoneg ?" setu ar pezh a c'houlenne Le Mercier ouzh an dud e Gouel ar Brezhoneg, er Pont. "AR brezhoneg" !!! Dispar aotrou-le-conseiller-pédagogique... war e leve. Kenlabourer gouarnamant Giscard war ar marc'had !!! Karout a rafemp gouzout goude peseurt irienn bolitikel eo bet dibabet A. Le Mercier evit servij gouarnamant Giscard ? Tud 'zo o deus komzet brezhoneg d'o bugale ares goude ar brezel, daoust d'an tufadennoù ha d'an dispriz. Ne oant ket gwall niverus. Per Denez a oa unan anezho. A. Le Mercier ne oa ket : re gourajus e oa ret bezañ. Met evit kenlabourat gant bandenn Giscard, riskl ebet ! Muioc'h a skiant-prenet en deus Per Denez evit ar pezh a sell ouzh an "enseignement direct" peogwir en deus komzet brezhoneg d'e vugale... Lakaet en deus evel-se e venozioù da dalvezout en e di da gentañ. A. Le Mercier en deus disoñjet en ober. Aes eo dezhañ bremañ skrivañ d'ar Rektor, sevel planioù evit saveteñ ar brezhoneg ha me oar. A. Le Mercier a zo un tasmant kozh. Kenderc'hel a ra gant e alioù :

C'est bien pourquoi le système de la Faculté des Lettres de Brest (breton + anglais, éventuellement allemand ou français, etc...) est nettement supérieur au système de la licence rennaise qui suppose un CAPES et une agrégation.

Gwelloc'h eo hervezañ lisañs Brest eget hini Roazhon. (Souezhet oc'h !). Met pet studier a soñj evel A. Le Mercier ? An dek bennak enskrivet e Brest pe an 300 aet da Roazhon ? Lisañs Brest a zo un touell evit ar studierien (gvelout disklriadur rener skol-veur Brest). Diouzhtu o deus ar studierien komprenet an dra-se. A. Le Mercier, daoust d'e spered lemm, n'eo ket deut c'hoazh a-benn da gompren. "700 barricades ! Tire sur la corde. Jean-Marie, et je que je suis à aller fixer tour à-tour dans sa queue. Vu que sera." (kentel 9) "Fou-let le diable ! Attrapé j'ai de-lui." (kentel 9)

EVIT UR "VEL D'HIV." E BREIZH

Ma ne rafe Le Mercier nemet dekonif. Met setu : ur gudenn freudian en deus. An doare-skrivañ an hini eo. Abaoe bloavezhioù ha bloavezhioù emañ e vasañ kasoni. Ar mestr-skol bihan deut da vezañ (goude ur burzhad politikel) kuzh

TAGAN? SEUEL UR GOULAG?...

liar Giscard a implij doareoù euzhus evit diskar e enebourien : an tagaden-
noù personel hag ar flatrezezh.
Setu tammoù eus an daou lizher bet meneget e derou ar pennad-mañ :

C'est ainsi que les Nationalistes utilisent l'orthographe dite "zh"
de 1941 (Mr Per Denez, professeur à la Faculté des Lettres de Rennes,
Skol an Emnav, Diwan, Kuzul ar Brezhoneg), les Nationalitaires, le
"zh/ss" de Mr Morvanou (professeur à la Faculté des Lettres de Brest)
(Ar Falz, l'Union Démocratique Bretonne), et les "non-nationalistes,
non-nationalitaires" l'orthographe dite de l'Université (Mr Le Dô,
professeur à la Faculté des Lettres de Brest, Ar Skol Vrezoneg, Empleo
Breiz, le Bleu Brug catholique, l'Evêché de Quimper, Ouest-France, le
Télégramme, le S.N.I.-P.E.G.C.).

Lorsque les cours du C.N.T.E. ont été créés, à ma demande, seule
l'orthographe universitaire, qui a été approuvée par le Ministère de
l'Education Nationale en 1955, y était en usage. Depuis, on a pratiqué
la politique de la fuite en avant, et trois orthographe y sont admises.
C'est une aberration.

C'est ainsi que Mr Per Denez, opôtre du "zh" de
1941, vient de donner sa démission de kendalc'h

Il faudrait prendre le problème à bras le corps et qu'éventuellement
une solution autoritaire intervienne, comme il y en a une pour le fran-
çais. Celle-ci pourrait d'ailleurs être très sensiblement adoucie en
acceptant un grand nombre de tolérances. Lizher d'ar Rector

Il est d'ailleurs remarquable que ces locuteurs qui croient par-
ler le breton mais utilisent en fait une sorte de sabir, utilisent
l'orthographe "suronifiée" (bizarre, à l'époque de la "décentrali-
sation"), ce fameux "zh" qui, selon la célèbre lettre de Roparz He-
mon a été imposé en 1941 par le "gouvernement allemand" (Oh, pas
Hitler ou Goering évidemment, peut-être ne savaient-ils même pas
où se trouvait la Bretagne, mais par le lobby breton de l'armée
d'occupation) et "pour faire semblant de plier un peu devant les
Vannetais".

Quant aux "rêves nationalistes", il faut vraiment être polarisé
par ce sujet pour les mettre en relief. Ils n'ont vraiment été
traités que par deux écrivains: ROPARZ HEMON dans sa longue nouvel-
le "AN AOTROU BIMOCHET E BREIZ" qui nous fait vivre dans une Bre-
tagne de l'avenir où personne ne saura plus le français! et récem-
ment PER DENEZ dans son recueil "hirc'h eo an amzer eget ar vuhez":
Il y fait l'éloge des auteurs de l'attentat de Pré-en-Pail et met
en scène une jeune nationaliste bretonne qui tombe sous les balles
de la police française alors qu'elle attaque un avion sur un aé-
rodrome parisien.

FLATRAAN 'RA ...

En diavaez eus pilpouzezh Le Mercier ("Per Denez apôtre du zh de 1941",
a zo un doare da lakaat da grediñ traoù 'zo hep lavarout anezho... Re ris-
klus e vefe), e soñj din e veze implijet seurt doareoù e-pad ar brezel di-
wezhañ. Emichañs e reseve ar Gestapo lizhiri e-giz ar re a gas Le Mercier
d'ar Rector ha da brezidant an APEEB, ha da biv c'hoazh ? Eweljust n'eo
ket an hevelep danvez ; an doare avat a zo heñvel. N'eo ket an hevelep ku-
denn kennebet ; met Le Mercier ne c'houlenn ket ur "solution finale", mann:
goulenn a ra ur "solution autoritaire". N'eo ket memestra. E 1947 avat, en
ur pennad ("Ar skolioù dre lizher") bet embannet e-barzh Al Liamm (niv 4)
e c'houlenne Andrev Merser "unvaniezh ha nerzh an holl" evit advelel ar vro.
Gouzout a ra an holl ez eo A.Merser eil hanterenn Le Mercier. Digredus :
a-du eo bet Le Mercier gant ur skritur "imposé en 1941 par le gouvernement
allemand"!! Met perak ne zispleg ket Le Mercier an dra-se d'ar Rector ?
Mezh en deus ? Aon en deus ? Arabat dezhañ kaout aon ken ; war e leve emañ
bremañ ha gant ur mell titl ouzhpenn-se : conseiller pédagogique, n'eo ket
forzh petra ! Hag hini Giscard war ar marc'had ! Ha neuze kalz muic'h a
bouez a vefe gant e desteni. Ya, ret e vefe da Le Mercier lavarout ar viri-
onez d'ar Rector. En em santout a rafe dieubet a greiz-holl.

AL LIAMM		TAOLENN	
Nevez-Amzer Hony 1947 N° 4		Evidon-me, prest on da harpañ kreskidigezh Ober. A-benn tri miz, e c'hellin reiñ kentelioù diwar- benn ar C'herneveg hag e lennegezh.	
KEN	Andrev-L. Latimie	Goulenn a reomp digant pep Breizhad a gar e vro reiñ benn ar C'herneveg hag e lennegezh.	
DIVRODEZH AR GELTED EN AMZER	Boupinod	del hor bro.	
AR SKOLIOU DRE LIZHER, gant Andrev Merser			13
SKOLIOU KEMBRAEG E BREZHONEG, gant Skol Ober			14
WALES, gant Per Denez			17

(Lenn ivez "Goude bezañ gwelet Iverzhon" e-barzh Al Liamm -niv 5- skrivet
gant Visant Seite...) Dedennus.
Ar pezh a garfemp gouzout a zo an dra-mañ : daoust hag-eñ emañ A. Le Mercier
o vont da genderc'hel gant e dagadennoù euzhus ? War e leve emañ, an dra-se
a ouzomp. Hag-eñ ne c'hellfe ket neuze kavout traoù dudiusoc'h da ober
eget skrivañ drouktalloù d'ar Rector ? "Un s'ne vert-chou, Ah! Ah! Ja-
mais autant-autre!" (kental 6), setu
ar pezh 'vefe ret da Le Mercier
kenderc'hel da skrivañ. "Entendre
que fait-on l'âne à braire" (kental
6). Ret e vefe da Le Mercier impli-
jout ar stil kaer-se evit skrivañ
d'ar Rector. "Peut-être n'est pas
une idée mauvaise." (kental 5).
NOUS EN AVONS FINI AVEC NOTRE
COCHON (KENTAL 52)



AR MESTR-SKOL

ROPARZ HEMON
+ ZH (1941)
+ ZH/SS
+ AL LIAMM
+ PER DENEZ
+ DIWAN
= KOLLABO



N'EUS MUI KONIKLED, MET
CHOM A RA ZEDACHOURIEN!



AR CHASE

KELEIER AR MENEZ

Aotrou maer Plounevez ar Faou, kuzulier jeneral pastell votif ar C'hastell-Nevez, pennrener kevredigezh chasourien Penn ar bed (hag all hag all...) setu kargol pen-nañ Jean Hourmand, un dardoup anavezet mat evit pezh 'oa bet graet gantañ p'edo e penn kenverzhierien hag artizanet ar vro. D'ar mare-se ne veze ket brav bezañ o ter-c'hel ur "greizenn Leclerc" pe ur stal vras e-giz-se, ha nebutoc'h c'hoazh labourat e-barzh. Tro 'm eus bet da velout J. Hourmand gant e vignoned, gwechall nevez, p'edo o klask aloubif pe gentoc'h plantañ bec'h reuz ha freuz e "kreizenn Leclerc" ar C'hastell-Nevez. Degaset 'oa bet ur stlejerez gantañ zoken, unan gant ur forc'h vras evit an teil e-penn-araok ! Marteze e soñje dezhañ c'hoari gant paotred Mari Robin ? Pep hini e vekanik neketa ? Kouezhañ a rae puih a-hend-all, stank ken-ken war ar stal genverzh, kanetnoù dir. Un dudi 'oa d'ar vugale gwelout ar re gozh oc'h en em zibab kenañ-kenañ ha da vat gant batallmoù pe daolerezed-mein ma kavit gwelloc'h. Ne oa ket ken plijus memestra evit ar paour-kaezh marc'hed a boagne er stal, arvarus un tammig ne lavarant ket. Eveljust ne vez ket laosket an dud da beure-shuif un dizalbadenn e-giz-se ha buan a-walc'h e voe gwelet archerien o pourmen o c'halite war stradaoù ar C'hastell-Nevez, an nozvezh hont e Plounevez ar Faou. An dardouped n'int nemet tud ouez ! Daoust hag-ef ne vez ket graet "Chas Ploue" eus Plounevez gant ar re a zo o chom eus an tu-mañ d'ar stêr-Aon ?

Paket en dos brud Jean Hourmand gant doareoù ober e-giz-se moarvat, un nebut amzer goude e voe gouest da vevañ dilennet kuzulier jeneral. Kemeret en deus plas ur paotr eus ar P. C., an aotrou Hemeri eus Leuhan ! Kit da gompren pezh a lak an dud da vont eus an eil tu d'egile evel-se ! Dav eo lavarout ar wirionez penn-da-benn, n'emañ ket kamalat ar chasourien eus an tu kleiz tamm ebet. Er c'hontrol krenn. E mod-all n'en deus ket aon da gamañ e c'har er festoù-noz amañ giz-mañ ha war ar me-mes tro e led e abostolerezh.

Ur paotr eus an tu dehou eta, ha n'eo ket un hanter hini. Ne voe'h ket souezhet neuze pa vo lavaret deoc'h e c'houlenn J. Hourmand, hag a-bouez penn, ma vefe savet ur greizenn nukleel all e Breizh. Hinniennod a lavar en dije dastumet glau pa eo bet savet kreizenn nukleel menez Arre. Hemañ a oa eil-vaer e Breizh hag a-rao ma-er ma oa bet asantet an traoù gant ar c'huzul kêr. Gwerzhañ a rae simant a-hend-all. "En ur werzhañ simant d'ar re a save kaoter an diaoul a vez gwelet 'tal kichen" ar yeun elez" hiziv, eo bet leuniet e yalc'h a lavar ar re o deus anavezet mat ar chanter-se. Kenderc'hel a ra Hourmand da werzhañ simant... Piv 'oar ? Marse e soñj dezhañ dastum griffoù adarre gant ar grizenn da zont ?

Lennet ez eus bet gant an holl kazi-sur, pennaod 'zo e "Ouest-France" a gonts an tabutoù diwanet etre J. Hourmand, eus an tu, tud ar gelaouenn "Oxygène" hag an S.E.P.N.B. eus an tu all. Met moarvat n'eo ket bet klevet gant tout an dud Paotr Plounevez o toullañ kaoz gant Guy ar C'horr a labour evit Radio an arvorik. Un abta-denn e brezhoneg mar plij ganec'h. Dont a rae druz ha stank gant divaller al lazherien konikled, kunujennod a-bep-seurt a-enep da re an S.E.P.N.B. Hogen, a-benn ar fin, n'eo ket un dra nevez petra bennak ma 'z eo arouezius a-walc'h e emzalc'h. Alies, tud ar ouenn-se a vez techet da gunujennif hag a-wechoù da skein pa ne vezont ket barrek ken da gavout arguzennod... evit kaozeal.

Ne blij ket dezhañ tud an S.E.P.N.B. eta. Bout 'zo tud all c'hoazh a vez degemeret fall gantañ ivez ha nevez 'zo eus bet diskleriet gant paotr al lazherien klujiri, ur frazenn eus ar c'hentañ n'eo ket tremenet e-biou da zivskouarn labourerien ar vro-mañ. Soñjal a ra da Jean Hourmand emañ an artizanet o vevañ "sous la hantise des syndicats" ! (O. P. 9.10.81. evit ar re gurius). Moarvat e vefe gwelloc'h gant maer Plounevez ar Faou ma vefe laosket ar vistri d'ober o jeu e-giz a fell dezho. Moarvat e vefe gwelloc'h gant paotr al lazherien kizhier ma vefe tu lemel kuit an holl virioù a zo bet gounezet gant al labourerien goude stourmoù start-tre a-wechoù. Setu pezh eo gouest da lavarout ur c'huzulier jeneral dirak an ispred hag ar gazetennierien. Ne vo ket start deoc'h ijinañ peseurt prezegennod a zeu gantañ p'emañ en e gorn-bro o charinkañ ur fistolenn. N'eus ket da vevañ souezhet goude kement-se o velout mestr ul labouradeg a ra gwestell e Plounevez ar Faou klask lakaat paotr ar sindikad er-maez eus e stal-labour kousto pe gousto. Ne fell ket d'an Ao. Kadiou klevet kaozeal eus ar sindikadoù ! Tremenet eo c'hoazh dirak ar

(Kenderc'hel a ra / pajenn 25)

AR STOURM

ARABAT EO KOLL NA NERZH NAG
AMZER... MOR STOURM EVIT BREIZH.
NE VEZH HAG HE FOBL A RANK
BEZAÑ UR STOURM PEMDE... ZIEK!



SELL, NAG A AMZER
KOLLET GANT AR RADIO!
AMañ E BREIZH NE GLEVER
HOGOS NEMET GALLEG!
HAG AR PANELLOÙ -LEC'H!
NE VEZ MORSE GER
BREZHONEG EBET ER
BODADegoù FORAN!
POENT BRAS CHENCH
PENN D'AR VAZH!!



RET MAT E VO DEOMP BEZAÑ
TAER HA GOULENN GROSS BREZHONEG
E PEP LEC'H... PE E VARVIMP BUAN!



'A MAMM! QUI VEUT
QUE TU VIENNES!

BON! J'ARRIVE!



'oar hec' galleg, da vignon?

16

'S'IL EST COMME
MOI, IL AIME BIEN
PARLER BRETON!...



eo! e-gizdon eo, plijus e rav kuzul ar brezhoneg!

LOENED GOUEZ BREIZH



AR VILVIG

(Turdus Philomelos)

Anvioù all ar vilvig

- . Milvid, Milc'hwid, Gilvid (gg)
- . Suter (g) (Kerlouan)
- . Morzig (g) (Plougerne)
- . Labous treut (Kerfeunteun)
- . Bondrask (gg) (Karaez)
- . Savelleg (g) (Melioneg)
- . Drask moan (g) (Skaer)
- . Poulpri (g) (Brasparz)

(kastrilhez, spevad, hogan, hervez ar c'houlz-amzer. Tamalodet e goueled an neizh, pevar vi glas-splann brizhellet a darchoù du. E miz Ebrel eo e sav ar vilvig he neizh hag alles e vez an eil torad e kreiz miz Mae. Ar vamm eo a vez o c'horif ar vioù. Morse ne vo gwelet an tad war an neizh.

Darn eus ar vilviked a zo "laboused-red", repu a gavont e-doug miziou kriz ar goañv e Bro-Spagn, Italia, su Bro-C'hall pe e gwalarn Bro-Afrika. Darn all a chom war an tach a-hed ar bloaz en em barat a reont un tamm abretoc'h eget an tremenidi.

Laboused-red = migrants

TUDU

KOUMANANTIT

Emañ an heol o vont da guzh ha skeud fivvus ar gwez o kreskiñ war ar brajenn c'hlas hag e klevet e beg ur dervenn ur vilvig o kanañ a bouez-penn. Pelloc'hik, e pleg ur wenojenn dizarempred ez eus ur vilvig all o strivañ da zrailhañ krogen ur velc'houedenn evit he debrifañ. Derc'heil a ra ar grogen en he figos hag a daolioù penn nerzhus esko homañ ouzh ur maen riklet diouzh ar c'harzh e-giz ouzh un annev. En ur lammakat e tremen dindan sil ur bann heol er brouskoad. Rouz-olivez eo he c'hein hag he choug ha marellet eo he c'hrubuilh gwenn-rouz a vrialennoù du. Un tamm mat bihanoc'h eo eget an drask louet hag heñvel diouzh ar borzevelleg paneve n'he deus roudenn-benn du ebet. Ur sell er brouskoad hag e welit en un ivinenn, ur metrad bennak a-us d'an douar, neizh ar vilvig. N'eus ket da faziñ : savet eo bet gant bleñchoù, kinvi ha delioù sec'h liammet ha peget kenetrezo gant dour ha skop. Kaletat eo bremañ dibarzh an neizh e-giz andilh an ti kozh. Kuitat he deus ar vamm he neizh. O klask he boued emañ

SONEREZH

CHICAGO BLUES FESTIVAL E BREST... BLUE NIGHT



Brest, 9 eur noz. Libistrenn peg ouzh ar betons. Gweañ a ra kribenn fourioù uhel viliñ keoded Bro-Leon gant dason ar blues, hini kalon bannlevioù ar c'hêrioù bras amerikan. Brest, kêrbenn ar blues e Europa ? N'eo ket souezh ! Blues-sil e pep straed, e askre pep keodedad antellet en o logelloù-konikled. Ar Penfeld a zo Mississippi Gorge-Leon. Rekourañs, Kerango, kerourien a glot gant anken, alfo ha bouilhenn ! Avel er seier, butun "gordini" ha bier fall ti Bakus. N'eus ket eus ar Blues hep alkol ha moged-flaer.

Kroget en deus an abadenn gant ur film eus an dibab : "Le blues entre les dents" (e brezhoneg = Blues en toull-trap) savet gant ur c'helaouenner eus ar Monde, C. FLEOUTER hag R. MENTHOULIS. Savet eo bet ar film war komzoù ar c'hanaouennoù blues o-unan. Mesk-ha-mesk e vo gwelet B. KING, B. MacGHEE, S. TERRY, troc'hou-kaoz gant prizonidi du, muntreier kon-daonet da veur a vloavezh toull-bac'h. Ur film divoutin ha turgnet-kaer.

Goude ur c'hard eur film e teuo al LEGENDARY BLUES BAND war al leurenn. Ar pep gwellañ eus an abadenn. C'hoariet o deus bet gant Muddy WATERS ha desket

mat ar vicher ganto. N'eus ket a yod ouzh o zreid ! N'eo ket "Country blues" hini al lann alaouret met klemmoù hirvoudus ar gitar dredan, hini an "Urban blues" latarek. Klemgan an den dilabour e-kreiz e anken ! Kan ar garantez o tont pe o vont da get. "Baby scratch my back !" = Plac'hig, skrab din ma c'hein ! P. PERKINS a ra d'e biano lammat e-giz un ejen digabestret, armonika J. PORTNOY (n'eo ket ar c'hoarier echedoù !) a vlej e-giz un targazh o klask fred d'ar rouznoz ! Hag e-kreiz an abadenn e strink Eddie CLEARWATER war al leurenn ! Ur ramz anezhañ, du e-giz ur sac'h huzil, dilhad justinok hag ur stratocaster a-istribilh. Ar boblañs a fraonv rak stag eo hemañ da ganañ pozioù Little RICHARD, doare Chuck BERRY gantañ da seniñ ar gitar. Ur "guest star", 'giz ma lar ar c'hallaoued, dianav din hag a vo bet un dizoloadenn ag ar choez !

UNLIMITED BLUES TIME, strollad Brest a zeuas goude-se. Tud a vicher, sur, ha netra da rebech outo paneve n'on ket gwall dik gant ar c'hastad trompihoù, saxo o harpañ anezho.

Ha setu Otis RUSH hag e strollad. Ur

KEMENNOU

KENDALC'H KELTIK ETREVROADEL

Berzh bras o deus graet an abadennoù sonerezh ha pezhioù c'hoari ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel er bloaz-mañ e LANUON ha tro-war-dro.

Echuet en deus ar c'hendalc'h gant ur c'heloù mat, p'eo bet desket e oa bet roet an aotregezh vrezhonek da Skol-Veur ROAZHON. Ur pell-skrid a zo bet kaset d'ar Prezidant nevez evit e drugarekaat.

Mod all ez eus bet mennadoù evit :

- goulenn dieubidigezh an holl doull-bac'hidi bolitikel breizhat,
- goulenn start digant Margaret THATCHER ma teufe buan dibenn an harz -debrif e toullou-bac'h Iwerzhon an Hanternoz,
- adc'houlenn unvanidigezh Breizh, oc'h ober ur rannvro gant he femp departamant.

Er bloaz a zeu e vo ar C'hendalc'h e Kerne-Veur. Daoust m'eo bihan ar vro ha yaouank an Emsav broadel aze, ez eo buhezek-tre skourr Kerne-Veur ar C'hendalc'h. Dalc'het e vo e PONS-AN-DANE e PENZANCE eus an 12 d'ar 17 a viz EBREL 1982.

Evel ma vo bihan al lec'h ez eo mat mirout ar plasoù a-raok hanter miz KERZU 1981. Keloù digant :

Loig Chapel - Roc'h ar Bleiz - 29210 Montroulez

KAZETENN AR VUGALE, UL LABOUR-STAJ
BA' KAZETENN AR MENEZ

KAZETENN AR MENEZ zo ur strollad deus kanton An UHELGOAD, oc'h ober war dro buhez sevenadurel/sokial ar c'horn-bro. Embann a ra levrioù ha kasedigoù ha dreist-holl e ra war dro ur gazetenn dre gaoc'h.

Implij a ra ar strollad un den leun-amzer ha stummet eo bet daou stajier en "emploi-formation" e-pad c'hwec'h miz.

ARMAGTDEON

20

ARABAT DISONJAL ADKOUMANANTIN...

Ur roll-labourioù zo bet roet dezho d'ober. E-toues al labourioù oa stajoù war ar maez, ha dreist-holl ur gasedigda sevel diwar ur soñj. Evit AR VUGALE eo bet savet KAZETENN AR VUGALE. Argazetenn-mañ zo ul labour-staj, neuze, graet nemet 'pad ur miz, daoust ma vize bet ret kaout muioc'h amzer d'ober anezhi.

Un toullad mat a c'hoantoù ha soñjoù zo bet, met ne oa ket posupl d'ober en ur miz Eost ne oa ket kelennerien ha bugale ba'r skol d'ar mare-se ... Pep hini avamo en e vod !

Koulskoude, hag e-ser pellaat ar barnadennoù un tammig, 'vez kinniget ba' KAZETENN AR VUGALE danvez priziuz koulz d'ar vugale evel d'ar re vras. Istor LOM WAR AR MAEZ, lennet brav gant Louisa PULLANDR deus PLOUNEOUR-MENEZ, ambrouget gant trouzoù pemdeziek an tiegezhioù-femm, a zo moaien implij anezhi ba'r skol, pe-tramant ba'r gêr. Ha kredif a ra da Yann e vo un dudi da lod selaou kanaouennoù Youenn GOUEZ.

Klasket zo bet ba'n tu all lakaat SPERED ar YEZH da dremen, gant kontadennoù kozh. "PAOTR AR ROC'H C'HLAS", distaget don gant an Itron RANNOU deus LOKERT Bro Bidar/Dardoup, a zesk deomp peseurt mod vize kontet d'ar vugale gwechall. (Ul levr vo skrivet 'benn nebeut d'assaat ar c'hompren).

A-wirionez, ma tispartiomp traoù mat, anzav a-walc'h a rafemp n'eo ket graet tout ar gasedig prop. Dec'h da larout ho soñj neuze !

KAZETENN AR MENEZ

Evit goulenn ar gazetenn :

Odile Dax - Balaneg berr -
29251 BOTMEUR

PESEURT DAZONT EVIT AR BREZHONEG ?

Nevez 'zo, hon eus resevet ul lizher eus Bro Flandrez, e Beljik. Skrivet eo gant un den a zo breutaer diouzh e vicher. Deut eo a amañ e Breizh, da dremen un nebeut devezhioù, e miz Mezheven, evit gwelout penaos emañ kont, gant ar brezhon-

eg er vro. Bet eo war-du Sant Laorans hag eno, emezañ, memes ar vugale a gomze galleg e porzh ar skol. E Gwengamp a boan m'en deus klevet brezhoneg 'barzh kêr, a lavar deomp. Dipitet eo bet o welout e peseurt stad emañ ar brezhoneg, ar pezh n'eo ket souezhus tamm ebet. Goulenn a ra "Petra 'vez graet evit difenn hor yezh ha petra 'zo tu d'ober". Eveljust ez eus bet kaset ur respont dezhañ o tisplegañ stad ar brezhoneg er gevredigezh, ar pezh a vez graet gant DIWAN, pe "EVID AR BREZHONEG", da skouer, ar gazetenn diyezhek a reomp war he zro, hag a vez lennet memestra gant 2.000 den div wech ar miz, ha n'eo ket nemet e Breizh. Displeget hon eus dezhañ ar pezh ne vez ket graet er skol izel, hag uhel, er skinwel, gant ar panelloù diyezhek hag all ...

Hor yezh n'eo ket ur c'hoari bennak tonket da vervel, nemet ma ne reomp mann ebet eviti. Paliou ar greizenn eta a zo "DESKIN ha KELENN ar BREZHONEG" da gement hini a fell dezhañ :

d'AL LUN 20 e 30 evit an deraouidi (15 d'an nebeutañ a vez dalc'hamat)

d'AR MEURZH 20 e 30 evit ar re a fell dezho komz, lenn ha skrivañ brezhoneg. Pleustret e vez war lennegezh hor skrivagnerien evel A. Duval, R. Hemon, Dir na Dor, hag all ... (etre 5 ha 10 n'eo ket a-walc'h pa ouzer diouziégezh an danvez emsaverien er vro).

d'AR MERC'HER da 14 eur betek 16 eur evit ar vugale 6 vloaz, pe goshoc'h, ez eus "Skol ar Merc'her". Deskiñ a reont hor yezh evel an deraouidi. Unan bennak a zo gouest da gomz ha meur a hini a gompren mat-tre ar brezhoneg. War-dro 15-20 a vez atav.

Febloaz ez eo da VERC'HER NOZ 20 eur 30 e kendalc'ho kentelioù an eil bloavezh (ar bloaz-mañ ez eus etre 15 ha 20 o vont gant an eil bloavezh studi).

d'AR YACU NOZ e vo prezegennoù e brezhoneg hag e galleg, filmoù hag all ... Neb en deus menozioù pe un dra bennak da ginnig a vo degemeret mat-tre.

21

mailh war ar gitar war am eus klevet . Meulduioù e-leizh ! Reif a reas e gitar da gCLEARWATER hogos diouzhtu. Moarvat e oa ront mat e votoù ! Setu n'on ket evit barn re vat.

4 eur. Mintin-goulou. Poent di-loc'hañ. Gwad e ostaliri ar Woodbar, a-daolioù kontell e paer ar c'hustum amañ. Ar polis war pont an Elorn. Epañ pe bleniañ, ret mat eo dibab !

Dibab a ran ar blues.....

TUDU

THE BRENDAN VOYAGE

An orchestral suite for uilleann pipe, composed by Shaun DAVEY - Tara records DUBLIN

Dek taolenn sonerezh nerzhus a ro buhez d'ur veaj, hini un Amerikan, Tom SEVERIN, hag a oa en e-unan war roudoù Sant Brandan, ar manac'h iwerzhonat hag a reas ur veaj betek an douar nevez, hervez skridoù ar grenn-amzer da nebeutañ.

Tom SEVERIN, gant e vag par da hini Brandan a brouas ne oa ket faltazi hepken e kaver e istor Brandan : gallet en deus dizoloñ Amerika en 9vet kantved.

An div veaj-se a roas ur menoz d'ur sonour iwerzhonat, ober ur seurt sim-fonienn : ar pip-ilin a zo tro-ha-tro ar vag, ar skipailh hag ivez ar feiz divuzul a vounte Brandan hag e dud davet douaroù dianav. Ul laz-seniñ a-bezh a ra ar mor, an avel, ar pesked, ar bed fetis, ar bed a-vremañ : neb a drid e galon na olev ar pib-ilin (sonet gant Liam O'Flynn), hag a blij dezhañ ar mor, a vo entanet gant ar bladenn-mañ a zeu a-benn da gendeuziñ sonerezh klasel ha sonerezh hengounel.

BEP SADORN e chom digor hol levraoueg da neb a fell dezhañ amprestañ levrioù brezhonek pe c'hallek : romantoù, istor, kazetennoù hag all ... evit 1 lur hepken etre 17 eur ha 18 eur.

Ha ya, disoñjet hor boa lavarout deoc'h emañ hor mignon breutaer eus Flandrez, o teskiñ brezhoneg 'baec ur bloaz'zo bremañ Fet a dud a ra eveltañ e Gwengamp ? ... N'emañ ket e unan, pell ac'han .. diouzh e du Magoto Noguè a skriv : "DESKET AM EUS 'BREZHONEG EVIT OBER MEZH D'AR VRETON-ED N'OUZONT KET O YEZH".

HA C'HWI, PETRA 'RIT ?

- D'ar 26 a viz Du 1981 e vo ur gaozeadenn gant Reun Richard ha tud all diwar-benn ar skingomz-lec'hiet, e galleg pe e brezhoneg. Pedet e vo ar gazetennerien.

D'an 21 a viz Genver 1982 e vo an Actrou Dubourg a zispiego kevrin un danevell gant Dir-na-Dor, embannet war Pipi Gonto "Paotr e skourjez ler". E brezhoneg ar wech-mañ.

KREIZENN - SEVENADUREL
VREZHON ROPARZ HEMON
22000 GWENGAMP

pe Mikael KORLE
Prad Kerleo
22200 PLOUVAGOAR

LESTR-SPLUJ RUSIAN EN
UR VOUTAILHAD GWIN RUZ.



ENERGIEZHIOU BRO-DANMARK

Evit ar wech kentañ ur film, 50 munud o savaret diwar-bouez unan eus ar c'hudennoù pouezusañ er mareoù-mañ, da lavarout eo hini an energiezh, a zo o paouez dont er-maez e brezhoneg. Savet eo bet ar film-se gant Per Manstaed ha bez eo bet lakaet e meur a yezh c'hoazh (daneg, galleg, japaneg, alamaneg, katalaneg, italianeg...). Kinnig a reomp deoc'h an hini vrezhonek.

Ar film, lakaet e brezhoneg gant ur skipuilh deus Bro-Gerne, a zo ur respont da veur a c'houlenn :

- soñjal a ra deomp eo mat kinnig skouer Bro-Danmark, kement a draoù heñvel a zo e-barzh an div vro.

- bez emañ Danmarkiz araozomp evit ar pezh a sell ouzh energiezhioù a c'hell bezañ adnevesaet.

- war lerc'h trec'h Plogof, ha n'hellomp ket sellout outañ evel ur pal, e soñj deomp e rank hon bro-ni bezañ gouest da broduiñ energiezh. Evit ober anezhi e ranker taoler kont eus ur gudenn all a-bouez: hini an dilabour. Diskoulm an div gudenn a zo produiñ an energiezh ni hon unan, en ur implijout kement tra a dalvoudegezh en hor bro (an heol, an avel, ar c'hlazenn ha nerzh an dour : sellit ouzh raktres Alter Bro-Vreizh). Lakaat an dud d'ober int o-uman an energiezh o deus ezhomm eo an diskoulm nemetañ evit tremen hep an nukleel. - Erfin, pal an droidegezh vrezhonek eo dis-kouez d'ar Vretoned eo o yezh ken barrek ha forzh peseurt hini all war forzh peseurt tachenn eus ar vuhez.

Brezhoneg gant : Andrew, Daniel, Gwenole, Marite, Marivon, Marsial, Yann-Lan.

Film 16mm e liv, 50 mn. Video VHS-U Matic (3/4).

Skinet gant Andrew Goalg, 63 Straed Pont 'Abad, 29000 Kemper. Pell. (98.55.43.07).

Sonenrollet gant Jakez Bernard, Atelier Bretagne Film, Kerlamen. Ploneour Lanvern.

Gant sikour Skol an Emsav Kerne Izel
Ti ar re yaouank Douarnenez
Iekra.

AL LANVII

22

KENDALC'H KELTIK 1982 - KERNE VEUR

"Dont bras en ur vro getiek" a vo danvez kendalc'h keltiek ar bloaz a zeu e Kerne Veur. Dalc'het e vo e Penzance (12-17 Ebrel 1982).

DALLETH a zo un aozadur a Kerne Veur a ra strolladoù-c'hoari e kerneveg hag a embann levrioù evit ar vugale. A-gevret gant Dalbeth e vo savet ar C'hendalc'h.

Tiegezhioù eus MEITHRIN a zeuio eus Kembre. A-bouez bras e vo da dud DIWAN ha d'an tiegezhioù brezhoneger dont ivez. Gant kresk an aozadurioù-se er broioù keltiek ez eo frouezhus en em gavout ha komz eus ar stourm a zo da ren.

Tud a vo eveljust da ober war-dro ar vugale vihan e-pad an emvodol. Mod-all e vo kaoz ivez eus ar sportoù keltiek. Ezhomm a zo e teufe tud eus aozadurioù breton ar c'hoarioù keltiek hengounel.

Evel ma'z eus bet miret kalzig a gambreier dija, e vefe mat d'an dud a fellfe dezho dont enskrivañ buan. Tu a zo da skrivañ da : Loig CHAPEL, Roc'h ar Bleiz, Sant Marzhin, 29210 MONTROULEZ.

AL LIAMM

EMBANNADURIOÙ AL LIAMM

JAKEZ KONAN Ar Marc'hadour a Vontroulez
25 pe 32 lur + mizol


REUN AR C'HALAN Levri ar Blanedenn
27 pe 52 lur + mizol

MAOZDEZ GLANDOUR Izaia
34 pe 40 lur + mizol

Digant J. Queille, 47 straed Notre-Dame
22200 GWENGAMP CCP 1136 82 Roazhon

KOUMANANTIT

K
GERIOU
O
KAEL 10
Z




A-LED

- I - Boueta e-pad ar goañv
- II - Prof - Rannig nac'hañ
- III - Er baner gant un tamm chañs
- IV - Vogalennoù
- V - Etenenn
- VI - Spoumuis

A-SERZH

- 1 - Asteriks da skouer
- 2 - Blejerien vihan
- 3 - Tage
- 4 - Arrouez kozhni - Div c'hoar
- 5 - Eeun-mat
- 6 - Raganv-gour
- 7 - N'eo ket gwan.



EMAN HOR YEZH O PAQUEZ EMBANN EIL
LEVRENN GERIADUR YEZH DOUARNENEZ
SAVET GANT PER DENEZ.

" AVEL, AMZER HA MUR " EO TITL AL
LEVRENN. 45 LUR E KOUST.

HOR YEZH, 1 PL. PEGUY, POUILLBRIANT


89 187 - LESREVEN

23


DESKOMP GERIOU NEVEZ

1. DAOU C'HER

Ma kavit petra a ziskouez pep tresadenn ha ma liammit anezho e kavoc'h ur ger nevez.




1



2



3



4

2. PESEURT LOEN EO ?

Gerioù nevez a c'hellit sevel gant an holl c'herioù skrivet en-dro d'ar c'helc'h-mañ. Evit se e rankit implij bep tro ul lizherenn eus ar skeudenn-greiz.



3. AR CHADENN

Lakait ar gerioù-mañ en urzh en-doare ma c'helloc'h adsevel gerioù all goude bezañ troc'het ar chadenn el lec'h ret. N'eo ket aes !

EZELOURMELHUANERC'HADOBER

RIWALL

PSI-KOZH-NOE gant Tudw



(KELEIER AR MENEZ / KENDALC'H)

Prudom peogvir e oa ret re bell memestra. Kenderc'hel a ra da hegasañ paotr ar sindikad ha reiñ a ra dezhañ al labourioù lousañ abalamour m'eo rediet da zero'hel anezhañ gant al lez-varn. Evel just J. Hourmand hag an sotrou Kadiou a zo kamaraded. Mat eo huchal ha choual a-enep'ar vosenn zu o tistroif" (Bremañ niv. 6/7) pa eo dav, rak gwir eo, bout zo tud eus an tu dehou pellañ oc'h ober war-dro ar strol-ladig SPV. Mat e vefe ivez, d'am men, gouzout resis gant piv emañ ar galloud e Breizh, hag aze ez eus anvioù anavezet madik awalc'h : Marcellin, Bonnet, Becam, Madelin...ha J. Hourmand en e gorn-bro. Ma fell deomp tizhout an emrenerezh sokialour un deiz bennak e vo ret deomp distroadañ an holl re-se hag an abretañ a vo ar gwellañ. N'int ket chalet tamm

ebet gant Pobl Vreizh, hen diskouezet o deus e-pad 23 bloavezh. Gall int pennkil-ba-troad ha bennez-Doue, ha gall e c'hemint forzh penaos. N'int ket bet plijet tamm ebet gant trec'h an tu kleiz ha goust int da lavarout pe d'ober forzh petra evit adkemer ar galloud. Kroget o deus dija...

PAOTR AR MENEZ

EMBANNADURIOU AL LIAMM

Da rakpreañ betek an deiz kentañ a viz Genver 1982.

KENAN KONGAR
BARZHONEGOU

28 lur war baper boutin (e-lec'h 36)
48 lur war baper Arches (e-lec'h 52)

PAJENN AR WUGALE : RESPONTOU

1. Daou c'her: 1. Ur gador - Ur vrec'h = ur gador-vrec'h.
2. Hir - Karrezenn = un hirgarrezenn
3. Ti - Ern (lern) = un tiern
4. Ul loa - An dour = ul loa-zour

2. Peseurt loen eo ?

Un azen eo al loen treset e-kreiz. Gant al lizherenn N : aon/naon. Gant al lizherenn Z : kael/kazel. Gant al lizherenn E : kar/kaer. Gant al lizherenn A : vi/avi.

3. Ar chadenn Setu gerioù nevez goude bezañ cheñchet plas d'ar gerioù ha troc'het ar chadenn : HUANAD / ADOBER / OBEROUR / OURMEL / MELEZ / EZEL / ELERC'H.

GALV

GALV D'AR STLENNATAERIEN VREIZHAT A
BEP YEZH, EUS AR PEMP DEPARTAMANT,
HAG EUS AR RE ALL, A VICHER PE A
GALON

Mat e vefe deomp bodañ, keñveriañ,
pinvidikaat, diorren hon anaoudegezhioù,
hon nerzh-labour, hor galloudegezh, hor
barregezh-oberiañ d'o lakaat en hor
servij-ni, hag e servij ar re a zo o
stourm evit ma vevo Pobl Vreizh hag he
sevenadur.

Ar stlennataerezh a zo ur benveg, ur
benveg hepken :

- gouest eo da greskiñ an dilabour, da
greñvaat ar galloud-kreizennañ etre
daouarn ar gevalacourien,

- gouest eo da vezañ lakaat en hor servij
dre zisammañ ac'hanomp eus al labourioù
mareadek pe zispiljus,

- Piv n'anavez ket, pe n'en deus ket
anavezet, ur gevredigezh bennak a zo
hec'h izili ar muiañ oberiant dreist-
samm gant ur bern paperachou (kont-
erezh, kannadigoù, koumanantou, h.a...)
ken n'hellont mui soñjal er pal di-
babet ! Da skouer, DIWAN a zo e bal
brudañ ar brezhoneg ha n'eo ket ober
war-dro an dud gopret (un heuliad n'eo
ken),

- ur benveg hiniennel, skort e dachenn
labour ? Tamm ebet ! Ar c'horrr
stlennataerezh a hiziv, hag hini
warc'hoazh, muioc'h c'hoazh, a zo (hag
a vo) liammet ouzh ar rouedoù hag ar
yoc'hoù-stlenn er bed a-bezh,

- ur benveg kemplezh ? N'eo ket ! Piv
a zo kad da zibezhiañ ha da adaozañ
keflusker e garr-tan en deiz a hiziv ?
Ra savo e zorn !

- ur benveg a zo gouest da gomz brezhoneg
gallaoueg, hag all

Ar stlennataerezh hiniennel a zo oc'h
en em ziorren ha n'eo nemet an derou ...
nemet un drouziwezh a c'hoarvezfe (Ar

re a zo anat dezho ur seurt-tra n'o
deus nemet postañ en ur goudor a-enep
an nukleel).

Ar STLENNATAEREZH a zo hag a chom
ur BENVEG, ur BENVEG HEPKEN.

Deomp-ni da gregiñ ennañ. Setu
perak eo kemennet ar galv-mañ d'an holl
re a fell dezho diorren, krouiñ, im-
plijout, deskiñ, kemer perzh e raktresoù
ar stlennataerezh e servij hor pobl hag
he sevenadur.

Ma'z oc'h dedennet, respontit ar
buanañ posupl en ur skrivañ da :

Fañch Ar BEG
8, avenue des Thebaudières
(Appartement 1.266)
44800 SAINT HERBLAIN

Gerioù diaes :


- STLENN = Information
- KEVALACOURIEN = Capitalistes
- HEULIAD = Conséquence
- OBERIANT = Actif
- STLENNATAEREZH = Informatique
- HINIENNEL = Individuel
- AR C'HORR STLENNATAEREZH = La Micro-Informatique
- ROUEDOÙ = Réseaux
- YOC'HOÙ-STLENN = Bases de données
- POSTAÑ = Investir




AN HANV E BREIZH



KARGEDOULL



DEGAS RAN DEOCH UN DANVAD DU.
HAG EVIT MA NE VEFE KET REUZ ETREZOCH
E CHOMIN-ME IVEZ WAR HOCH ENEZENW



ER-MAEZ!

